

2

AR PERSON BARVEG,

VICTORIUS VAR E ESCOP.

Var ton : MONSIEUR DE CATINAT.

UN Escop eus a Franç, den a galite vras ;
Oc'h ober e vizit ur vech en em dromplas ;
Eur Person a gavas hag a voa rust a vin,
Hac baro en devoa evel eur c'habucin.

Ar Person a hent all a oa bizajet mat :
Ta huel ha fri caer ha lêm a zaoulagar,
Hac a rê e zever ebars en e bares
Coulz a ma rê nicun ebars en dioces.

A N ESCOP.

An Escop p'er guelas a zeuas d'en ataqi
Balamour d'e varo, ha d'e inqieri :
A belêc'h, emezân, nac eus a be ganton
Oc'h-u deut er vro-mân evit beza Person ?
Hac eur ministr oc'h-u a doues an heritiqet,
Pe eur bêleg benac eus ar schismatiqet ?

A R PERSON.

Otrou, eme'r Person, a drugare Done,
N'en don en nep fêçon an eil nac egile ;
Me gred on christen mat, catholiq coulz ha c'houi,
Ha ne on get perac e teuit d'am ataqi.

A N ESCOP.

Ho paro eme'r Prelat, a gavân difêçon,
Ha ne aparchant get ouz bizach eur Person.
En amzer Moyses guechal voa permetet
Dougen ar barvou hir, mes bremâ int difennet.
Pel zo aba eo custum, ep a zo christenien,
D'en em raza qempen, dreist-ol ar vêleyen ;
Ne veler barvou hir nemet gant Souisset,

Gant tud a Voscovi pe gant chismatiqet.

Pere zo ridicul en ho c'bomportamant,
Qercoulz en ho barvou vel en ho guiscamant ;
Ha rac-se e cavan oc'h eus eur fazi bras
Ne douzit ho paro evit neuât ho faç.

Evel eun beretiç o caver er gis-se,
Ha goal exempl a roit gant ar varo hir-ze.
Ret e deoc'h he zroc'ha, pe me rai deoc'h ober ;
N'ouzoc'h qet marteze ous piou oc'h eus affer ?

AR PERSON.

Otrou, eme'r Person na zisplijit ganeoc'h,
Va baro a zo din, hac oc'h hini zo deoc'h ;
Gant Doue meus-hi bet, ha ne grefe biquen
E ve ret distruja ar pez a ro d'an den.

O barvou zo roet gant Doue d'ar vorset
Evit o distingui dious a femelenet :
Ar re a fell dezo beza anval outo,
A renq evit ar guir touza pis o baro.

Mês me ne fell qet din beza feminizet,
Na trêc'hi va baro, hac hi dija grizet.
Ne deotqet Souisset hepquen a zoug baro,
Meur a bersonach mat pere a zo maro.

O deus-hi bet douguet, hac a voa tud santel,
Tud habil, tud prudant ha christenien fidel ;
Ar Patriarchet côs el lezen ancien,
Ha prophêter Doue etouez ar Judevien.

Ebestel hor Zalver, hac an Doctoret bras,
Evel Sant Augustin, Sant Jerôm, Sant Ambroas,
Hac ar Pab Sant Gregor, ha Sant Yan Chrisostom,
Hac ouspen daou c'hant Pab demêus ar gêr a Rom.

A velomp zo pintet gant barvou bras hac hir,
Ha ne zougjen qet sur, ma no devize guir.
N'int qet bet tamallet gant nicun en o bro,

Qent-se voant enoret balamour d'o baro.

Ha mar en deus douguet ha Calvin ha Luther

Barvou hir evelte ebars en o amzer,

Ne deo qet ho barvou a zo bet tamallet,

Nag a zo bet caos ma voant heretiqet.

Ar gabucinet paour ne scandalizout den

Evit dougen barvou etoues ar gristenien.

Nan, nan, en em razit, grognit neb a garo;

Evidon-me bigen ne droc'hin va baro;

Guel ê ganén mervel, mar bezàn condaonet,

Evit col va baro, pa emeus-hi maget.

AN ESCOP.

An Escop en coler a lavar d'ar Person

E renq en em regli dious uzach ar c'hanton.

Uzach ar gabucinet, hervez o reglennou,

Eo dougen, emezàn, ha caout hir ho barvou;

Mes c'houi zo eur Person, n'en doc'h qet cabucina;

Hag a renq ho paro distaga dious ho min;

Rac-se absolutamant, na zisplichfe ganeoc'h,

Dre va otorite ec'h ordrenàn deoc'h.

Ma teufot pront d'e zroc'ha, pe non certenamant

E vezoc'h punisset evel eun insolant.

AR PERSON.

Eur c'hriminél paour a vize condaonet

Da vont d'ar galeou, da veza crouget,

Ne vize qet tristoc'h eget ma voar Person

Goude beza clêvet e gononacion.

Otrou Doue, mezàn hen n'n displijadur!

Ret e ve em enep cruel ha uinatur,

D'am beza condaonet da dréc'hi va baro,

Nan, nan, guel ê ganén anduri ar maro;

Ha grit a gaisot din, pa dlefac'h va laza,

Va baro a virin bete'n heur diveza.

4
AN ESCOP.

Ar Prelat o velet abeurter ar Person,
En accusas d'ar Roue hep na guir na rezon,
Hac a loras dezàn : Sire ho majeste
He deus va enoret ha roet din qalite.

He deus va grèt Escop ha roet din gallout
Ebars em dioces da gommandi partout ;
Eur Person paysant a zo em escopti,
En deus, var a velàn, c'hoant d'en em revolti.

Goab a ra ac'hanon, ha ne fel qet dezàn
Oboissa d'am urz, na ne rei, emezàn.
Justiç a c'houlennàn, digant ho Majeste,
Ha condaonacion a enep an den-ze.

AR ROUE.

Ar Roue pa glêvas ar Prelat o parlant,
A lavaras neuze : hennes so insolant ;
Ret eo e chasseal demeus an escopti
Ha demeus e baros, evit ma furai.
Reniet voe eul lizer sinet gant ar Roue
D'ar, Person d'e baros, hac estonet e voe.

AR PERSON.

Ia da ! emezàn, pa lennas al lizer,
Bourdet on ar vech-màn, ne don qet hep affer.
Ar Roue a barlant, n'aller qet rezista,
N'emeus gard da rifen, ret eo oboissa.

Ha guell ê ganén c'hoas rancout quitât va bro
Evit n'en deo rancout distruja va baro.
Mes pelec'h ezin-me ? Ar Roue ne verq qet
Pelec'h e fel dezàn e rafen va retret.

P'am eus va liberte, n'ouffen qet ober guel
Eget mont da Versaili da velet ar c'hastel.
Biscas n'on bet eno, hac e clêvàn conta
N'en deus pales er bed comparachet, ountâ.

Eno vo, a glevan, e vevu traou nevez
 Ha ne velzen biscoas vardro va siegez ;
 Ar Roue a velin hag e gourtizanet,
 Ha tud ar re vrava a voe biscoas ganet.

C'houi, va baro, zo caos-ma rer dia-me pourmen,
 C'hoant bras zo d'o drêc'ni, mes n'er graefn bigen,
 Ha james disparti entrezomp ne vezo
 Na vezin da genta condaonet d'ar maro.

Mout a ra ar Barveg da Versailles da chom,
 Arc'hant a gas gantàn, ne ouzer get ar som;
 Bale a ra dre gêr hag en dro d'ar pales,
 Aziabars er guel qercoulz ha diaves.

Guelet a ra ive ar Roue pa sorti,
 Pêlec'h benac e za, ha pa vez o tebri;
 Pa za d'an oferen e za d'e heutil ive
 Da glêvet ar muziq a rer d'e Vajeste :

Ne zeus eno jardin na bah da reded,
 Galeri, na traou caër, n'o guel tout ar Barveg.
 Ar bed ol a c'houlen, oc'h e velet hardis
 Da dostat oc'h ar Roue, hag a zell cutàn pis.

Piou ar bâleg barveg a velomp-ni amàn,
 Na pe a léc'h effén ? Ne get eus ar vro-màn.
 Den ne oar lavaret piou ê, na p'eus a vro ;
 Souezet ê an oll o velet e varo.

AR MARQUIS.

Alafin eur Marquis, mignon bras d'ar Roue ;
 A yas da gomz oantê dre guriosite.
 Orou, eme, ar Marquis, o comz ouz ar Barveg,
 Dious oc'h abillamant me gred ezoc'h bêleg.
 Me gar ar véleyen, zo mignon d'ar Roue,
 Ha mar oc'h eus affer dirac e Vajeste,
 Me gomzo evidoc'h dious an affer oc'h eus,
 A rento servich deoc'h dre ar pouvear emeus.

AR PERSON.

O trugarez, Otrou, emezàn d'ar Marquis,
 Oblijet bras ou deoc'h demeus hoc'h honestie ;
 Me zo eur Person ges exilet eus va bro,
 Ha ne mens qet a geus hervez m'ê deut an dro.
 Nep a vez exilet eus alers ar Roue
 A gustum detesti, fachas, touet Doue,
 Ha pedi mallozeou gant nep zo caes dezo
 Da vera exilet, chasseet demeus o bro ;

Evidon-me'r c'houstel na meus chagrin ebet
 O sonjal em bini, na d'e veza quitet ;
 Rac ma maon guell amàn eget na oan eno,
 Ne maon qet er gær-màs a euep va meno.

Em pares ne gaven nemet poan ha trevel,
 Labour epad an deis, ea nos rancout sevel,
 Coves, gaelet tud clàs hag ober sarmosiou,
 Ha caout poan ha chagrin ha calz a afferou.

Amàn emon erfat ; n'ea deas ea tout netra
 O troubli va speret, nag ous va dieza ;
 Lavaret va brevier, celebri va ofera,
 Ar rest eus an amzer a zo dia da bourmen.

Ha sulvui a velàn, emeus plijadurez
 O velet irrou qer caër pe gaëroc'h bemdez.
 Contantamant ameus, m'ar am bec biacoas ;
 O velet ar Roue, ha mui am bes c'hoas.

Eur barados bihan e cavàn e bales,
 Hag o sellet ountâ ne enoufen jaines ;
 Ha rec-se, va Otrou, n'emeus gard d'ho pedi
 Os barlant evidon na d'am recommandi.
 Ha qeiz ha ma caro, em lêzel er vro-màn ;
 Ne c'houleññan qet guell eget mervel ennàn,

AR MARQUIS.

Ar Marquis a c'houe o clêvet ar Person ;

Hac a voa joa gantâ caout an ocazion
 Da barlant anezân e prezanç ar Roue ;
 Disculiet voe'r Braveg, ha qemennet e voe.

AR ROUE.

Ar Roue, p'er guelâs, a c'houlennas ountâ :
 Perac, ha c'houi Person, emoc'h-u er vro-mâ,
 Ha na yet d'ho paros da viret ho terved,
 Evel m'ê ho tever ha ma zoc'h oblijet?

AR PERSON.

Allas ! Sir, emezân, mar emeus-bi quietet,
 Ne get me zo qinec, ganeoc'h oun exilet.
 Evit oboissa da urz ho Majeste.
 Emeus abandonet va denved er c'his-se :
 Cetu amâ'l lizer, gant ho torn ê sinet,
 Herve oc'h ordrenanç emeus oboisset.

AR ROUE.

Penaos, eme'r Roue, exilet oc'h amâ !
 Pa exilân-me tud, pell cont dious ar vro-mâ.
 Hac ouспен qement-se, me ne exilân get
 Anes n'am be rêzon : petra oc'h eus-hu grêt?

AR PERSON.

Mar plich d'ho Majeste va c'blêvet, emezâ,
 Me gonto deoc'h perac ezon deut er vro-mâ :
 Va Frelat, a gredân, en deus va accuzet
 Dirac ho Majeste, hac en deus ho suadet.
 Balamour d'am baro, e defor e zroc'hâ,
 Cetu eue'r sujet ma usplijân dezâ :
 Caër am boa rêzoni ha clasq en em difen,
 Ne breze get chelaou ar pez a lavaren.

Ret oa din, emezâ, hep rezoni morze,
 Triec'hi cren va baro, p'otramant e zroc'bjec ;
 Va humor zo calet, ha ne meus get gallet
 Cousantû he zriec'hi anez bout condaonet.

Ma vizen cbicuner, var boues dispiga arc'hant,
 Em bite gonetet o veza appellant ;
 Mes guell e bet ganen finout er Brovidanç,
 Hac en em rezolvi da zouffr poan ar setanç.

Ar setanç zo roet ma vizen exilet,
 Ha gant soumission emeus oboisset,
 O veza guell genen sornial eus va bro
 Eget na vize sur distruja va baro.

Ho Majeste, Sire, o tout d'am exila !
 Ne lavare qet din pelec'h en em denma :
 Pelec'h e yazen-me guell d'ober va retret
 Eget da Versaille? evel ma zon-me deeut.

Nemet er barados e c'hallen-me pignat,
 Ne vouizen donet guell evit ober erfat.
 D'ho Majeste, Sire, va Frinç ha va Otrou,
 En em soumettan tout ha d'oc'h ordrenançou.

Ho madelez zo bras; credi a ran certen,
 Hervez ma remerçan var ho pizach laouen,
 E permetfot din-me dougen va baro qez,
 Pa na ra droug da zen, be e fin va buea.

AR ROUE.

It, it, eme'r Roue, achuet ar procez :
 Dalc'hit mat d'ho paro, ha distroit d'ho parez ;
 Daou c'hant scoet o pezo evit ober ho peach,
 Ha me a c'hourchemen na zeui deo d'oc'h ampech.

An histor zo plèzant evit ar Person qez,
 Mes evit an Escop n'en deus bet neme tmez,
 Ne barlanter en qer, er pelez nag er ru,
 Nemet eus ar Barveg gant e zoutanen du.

Ar hed oll a lavar en deus eus speret mat ;
 Ha nemet goab na rer partout eus ar Prelat.
 N'en de qet mat d'an dud, dre zominacion,
 En em expozi re da gaout confuzion.